


MA C'HOUEFIG GWEN

Da Franseza Nicolas, « Merc'h Breiz-Izel »

Allegretto. (♩ = 116.)




Gwe-chali pa oan er ger, Ma c'houe-fig gwen! Yaou.



ank ha di-bre-der, Ma c'houe-fig gwen! Gant



na mam, bep sul, bep gouel, Le-ve-vez em c'ha-lon a vu-



gel, C'hen d'an o-fi-sou san-tel, Gant ma c'houef gwen.

Gwechall, pa oan er ger,
Ma c'houefig gwen,
Yaouank ha dibreder,
Ma c'houefig gwen,
Gant ma mam, bep sul, bep gouel,
Levenez em c'halon a vogel,
C'h en d'an ofisou santel
Gant eur c'houef gwen.

War gern ar meneou,
Ma c'houefig gwen,
Gant ma denvedigou,
Ma c'houefig gwen.
Nag a bennad eürusted
M eus bet, etouez ar brug alaouret.
O kanan ma Breiz karet
Ha ma c'houef gwen.

Epad ma yaouankiz,
Ma c'houefig gwen,
Gant enor e talc'his
D'ani c'houefig gwen:
Ped gwech em eus baleet
A Gerne ar pardonioù brudet,
Gant ma brozig marellet
Ha ma c'houef gwen.

War ma hent, eun devez,
Ma c'houefig gwen,
— O dousât levenez!
Ma c'houefig gwen,
Me a gavas eur mignon,
Eun den reiz, eur Breizad a galon,
Hag a gare eveldon
Ar C'houefig gwen.

D'in-me, gant karante,
Ma c'houefig gwen,
Lies e lavare,
Ma c'houefig gwen,
« Abaouez pell-zo, mignonez,
« Em eus da choazet, dre ma tougez,
« En stum eur gwir Vreizadez,
« Da gouefig gwen. »

Hag eun de ar gwellan,
Ma c'houefig gwen,
Oan unanet d'ezan,
Ma c'houefig gwen,
O pegen kaer hon eured,
Endro d'imp kerent ha mignoned,
Gant tokou houlouzenet
Ha kouefou gwen!

En ziuouder ar maeziou,
Ma c'houefig gwen,
Pel diouz trouz ar c'hériou,
Ma c'houefig gwen,
E vevan, gant levenez,
Ha, 'vel breman, pad ma buhegez,
Me a veulo, hep paouez,
Ar c'houefig gwen.

Veldon, Bretonazed,
Ma c'houefig gwen,
Miret, miret bepred
Ar c'houefig gwen,
Dougomp-han, hon fenn uhef,
Harzomp na deufe tok ar strinkel
Da dre'chi, 'n hon Breiz-Izel,
War ar c'houef gwen.

Ganimp, 'hed hon buhe,
Ar c'houefig gwen
Hon heuilho c'hoaz en Ne,
Ar c'houefig gwen;
Ar c'haeran vo da welet
Eno, 'touez ar poblou kurzinet,
'Vo c'hoaz ar Vretonazed
Gant koefou gwen...

FILOMENA CADORET (Koulmig Anvor).